

Taolennou

ar

Mision



A. LAJAT

31, Streat ar Feunteuniou


MONTROULEZ



I — Taolenn an ene touellet er bed
gand ar pec'hejou kapital

Taolomp pled war an taolennou
 'Zo mellezour an eneu,
 O vont d'an Env, hent ar glanned,
 Pe d'an lfern, hent ar pec'hed.

Ourgouilh, koler luksur, avi.
Avaristed ha diegi,
Gand ar vezventi milliget,
A ra bemdez kals tud daonet.



II — Taolenn an ene pardonet, o servicha Doue

Lakit urz vat en ho puhez,
 Rag ar maro 'zo didruez ;
 Puns an Ifern en o c'hichen
 'Zo digor frank d'ar bec'herien.

Red eo raktal, a wir galon,
 Digant Doue goulenn pardon,
 Kemeret hent ar binijenn
 O senti mat ouz e lezenn.



III — Taolenn an ene lezirek ha kaledet er pec'hed

An nep a zo rall da bedi,
 Diegus da zakramanti,
 Euz skilfou lemm an drouk spered
 Ne c'hello ket biken tec'het.

Labourou-sul, dans, ebatou,
 Vil darempred, bal ha skridou,
 Morse ganto, n'eus da c'hedal.
 Met buhez trenk ha maro fall.



IV — Taolenn an ene o kenderc'hel start war hent ar Baradoz.

Ar c'hristen mat, noz a mintin,
Gand e familh yad'an daoulin,
A glev devot an oferenn,
A gar kovez, rei aluzenn.

Ar c'hristen mat, gant karante,
A vir bepred lezenn Doue ;
Leun a fizians e c'hell gortoz
E gurunenn er Baradoz.